



## Barzh ar poull, War ar ribl

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Evit piv ?

Adalek ar cp en ur sal vras pe get

### Talvoudegezh ar c'hoari

mestroniañ e gorf , bezañ aketus

### Pal ar c'hoari

Seveniñ urzhioù rener ar c'hoari hep faziañ

### Mont en-dro ar c'hoari

Epenn kentañ ar c'hoari emañ an holl c'hoarierien hag ar rener war ar ribl (da lavarout eo en diavaez eus ar c'helc'h). Lammat a ra rener ar c'hoari e-barzh ar c'helc'h en ur lavarout « e-barzh ar poull »;. ar c'hoarierien o deus da sentiñ ouzh an urzh.

Kenderc'hel a ra rener ar c'hoari. Ma lâr « war ar ribl » e lamm ar c'hoarierien, war gil, met, ma lâr en-dro « barzh ar poull » n'o deus ket da fiñval peogwir emaint e-barzh dija.

Evit pakañ evezhiañs ar c'hoarierien e c'hell rener ar c'hoari, lammat pa n'en deus ket d'ober (pe ar c'hontrol) cheñch ar gerioù en urzhioù : war ar poull e-lec'h barzh ar poull barzh ar ribl e-lec'h war ar ribl

### Evezhiadennoù

Gwelloc'h chom hep argasiñ ar c'hoarierien; reiñ poentoù , an hini en deus an nebeutañ a boentoù a c'hounez.

### Doareoù all da c'hoari

Evit ar vartoloded vihan implijout urzhioù all :

barzh ar mor : lammat e-barzh

war an aod : lammat war gil er maez ar c'helc'h

tu `zo da ouzhpennaat : war vag : chom difiñv